

Bleuniou o tremen

Pa oan er min-tin-man o vont da ger-c'hat
 dour Pa oan er mi-tin-man o
 vont da ger-c'hat dour, E kle-viz an eos-
 -tig er c'hleuz o ka-na flour E
 kle-viz an eos-tig er c'hleuz o ka-na
 flour.

I

Pa oan, ar mintin-man, o vont da gerc'hat dour,
 E klevis an eostig er c'hleuz o kana flour.

II

En e zon e lare, kuzet gant an deliou :
 « Dre ma astenn an hanv e koll ar bleun o liou.

III

« Miz mae zo aet en dro gand an nevez-amzer,
 « Breman gwrez an heol tomm d'ar bleun zo re
 [bounner.

IV

« Bleuniou pet ac'hanoc'h a wenv bemdez breman,
 « Bleuniou koant o tremen buan diouz ar bed-man.

V

« Ne chom ket pell ar bleun da deure! o c'houez vat :
 « Ret eo d'ezo kuitat, gwenvi, tremen timat.

VI

« Ar rozenn bet ker fresk a zizec'h war he bod :
« Pennherez Kerbendrez a zisliv ruz he jod.

VII

« Eurus ! o ya ! eurus an neb a varv yaouank !
« War e vez e vernier ar bleuniou stank-ha-stank.

VIII

« Eurus eo ar werc'hez a dremen 'vel ar roz,
« He c'houez glan ouz he heul a bign d'ar Baradoz ! »

IX

Hag an eostig gant herr a dec'has dirazon,
En eur gana sioulik diweza poz e zon.

X

Pennherez Kerbendrez a varvas antronoz.
Tremen a reas-hi 'vel ma tremen ar roz.

XI

An eostig a ganas e kichen ar feunteun :
« Gant an nevez-amzer eo e tremen ar bleun,

XII

« Me wel d'ar Baradoz o pignat gand ar skeul
« Eur vleunennig tener, hag he c'houez vat d'he heul. »

EOSTIG KERINEG.

